

EXOKIT

# AR VAN LIFE\* WAR-HED DORN

Pe e vefe evit un dibenn-sizhun, ur sizhunvezh pe memes e-pad ar bloaz, e vez muioc'h-mui a dud e Frañs o hunvreal er vanoù kempennet a ra dezhe soñjal er vakañsoù hag er frankiz. War borzh al Lege e Sant-Brieg emañ ar stal Exokit ma kaver diskoulmoù evit kempenn ur van diouzh c'hoant pep hini, gant arrebeuri e kit, d'ar vitrakerien – memes ar re a vez a-wechadoù hepken – da gregiñ e-barzh evit adfichañ o c'harr.



THIERRY JEANDOT

**B**ezañ zo istorioù hag a gomañs a-greiz-tout. Ur skouer vrav eo hini Exokit. E 2020, war borzh al Lege, e oa Raphaël Guigo ha Morgan Barroux o klask ober un dra bennak goude ma oa serret ar stal ma oant o labourat o-daou. « Ezhomm hon doa da gavout ul lec'h evit bitellat ha labourat war ar pezh a felle dimp ober pep hini eus e du, en deus soñj Raphaël. D'ar mare-se e oan e-sell da lañsañ un dra war dachenn ar plankennoù-dre-lien. Evit Morgan, krog e oa da gempenn ur van Ducato. Graet e oa hon soñj ganimp da rannañ ul lec'hienn etrezomp hon-daou el Lege. » Gouzout a rae Morgan diouzh an tresañ 3D, gant-se e fardas un azezenn lem-laka diouzh muzul, hag a sachas evezh an dud. « Tout an dud a lâre dimp : « Dreist eo an dra-se ! » Neuze hon doa soñjet e c'hallfemp ober kemend-all evit tud all ha diwar-se e oa krog afer Exokit da vountañ en hon fenn. »

## BERZH KENKENT

Broudet ma oa gant ar birvilh a oa gante e prenas Raphaël ur van nevez, un T5. « Bet eo oc'h ober prototip ganimp, emezañ. Embannet e oa bet daou pe dri foltred war Internet, ha lev ! Gwelet eo bet hon labour gant ur c'hempenner hag en deus goullet kaout 10 en un taol. Ar vrud zo aet war-raok da-heul. » Neuze e voe krouet ar stal Exokit end-ofisiel e miz Du 2020. He jeu dezhi ? Ijinañ ha sevel arrebeuri diouzh muzul evit adkem-

Raphaël Guigo et Morgan Barroux dans un Transporter T6 récemment aménagé par Exokit.

**« HANTER HENT ETRE AN ARTIZANEREZH HAG AL LABOUR PEUZINDUSTRIEL »**

penn vanoù ha chalbotennoù. Gant un dra hep e bar, ha neket un dister dra : pourchaset e vez arrebeuri e kit, d'ar brenerien da staliañ anezhe o-unan.



Retrouvez cet article en breton et en gallo sur [cotesdarmor.fr](http://cotesdarmor.fr)

## PLUS D'INFOS

Exokit / Homad - 10 quai Armez  
22 000 Saint-Brieuc  
[www.exokit-van.com](http://www.exokit-van.com) - [www.homad-van.com](http://www.homad-van.com)

Mod-se ne goustont ket ken ker, ar pezh a blijas d'an dud kenkent : daou vloaz goude e kinnige Exokit ouzhpenn 45 patrom diouzh muzul evit ar vanoù, koulz ar re vras hag ar re vihan. staliet diouzh c'hoant pep hini... Fardet e vez tout ar pezhioù, nemet ar c'hinkailhe-rezh, war al lec'h, el Lege, en ur stal-labour 10 implijad enni, ma c'haller produiñ peadra da gempenn 450 karr bep bloaz. « Emaomp hanter hent etre an artizanerezh hag al labour peuzindustriyel », a wel a-walc'h Morgan, en deus imor da vont pelloc'h ganti. Rak savet zo traoù all da-heul Exokit dija. Alies e teue tud da welet anezhe abalamour ma felle dezhe lakaat adkempenn o c'harr penn-da-benn, gant-se e oa bet lañset Homad gant Raphaël ha Morgan e miz Mae 2022. Gant ar stal nevez-se e vez renevezet pe pourvezet, evit ul lodenn pe penn-da-benn, vanoù nevez pe re eildorn. Evel kustum gant Exokit e vez graet an traoù diouzh muzul ha ma vez ezhomm e c'haller staliañ prenestroù ouzhpenn enne, lakaat anezhe da vezañ didreuz, staliañ tredan pe ur gegin aotreet... hag arrebeuri Exokit evel-just. « Emaomp e-sell da grouiñ ur rouedad stalioù Homad françhizet e Frañs, abalamour da vezañ tostoc'h ouzh ar pratikoù ha d'en em astenn », a zispleg Morgan. Da c'hortoz emañ skipailh Exokit o paouez krouiñ ur produ nevez evit an dud a fell dezhe tremen vakañsoù baleant, ha pa n'o defe van ebet. « Empennet hon eus ur val enni peadra da gousket, ur sklaserzh, un dommerez hag ur c'huzhiad dour, a zispleg Raphaël. Lakaet e vez er c'houfr ha ganti e c'haller lakaat n'eus forzh peseurt brek pe karr dezougen da vont d'ober ur van bihan, ha gallout a reer renkañ anezhi er c'harrdi pa ne vez ket implijet. » Peadra da lakaat muioc'h a dud c'hoazh d'anavezout ar van life\* ! ●

Virginie Le Pape

\* ar mod bevañ en ur c'harr adkempennet, tost ouzh an natur ha gant frankiz da vont ha da zont.

EXOKIT

# LA VAN LIFE\* À PORTÉE DE POGNE

Pour un about de s'menn, ene s'menn ou cor pour vivr' tout along l'anée, les vans éran-gés, signifiante de laizis et de liberté, font rêver de pu en pu de Français. Su le port du Léghé à Saint Bérieu, la souète Exokit perpôze des chieus d'aménaïjement su mesure, o des meubl' en kit qhi permettent éz bricolous - même du dimanche - de s'embriver den l'aménaïjement d'un véhicule.



THIERRY JEANDOT

**G**'na des équerouées qhi démarre ao quart de tour. Ielle d'Exokit ée un bel emple. 2020, port du Léghé : Raphaël Guigo et Morvan Barroux cherchent à s'erchomer sieute à la cllôzerie de l'enterprinze oyou qui s'étint soutiers. « On avoet besoin d'un endrét pour boutiqer et travailler chaqhiun su nos sonjerries, se rapelle Raphaël. Ao temps là, j'avaes den l'idée de parti su des éfères de pllanches à vouèle. Morgan, lu, avoet entamé l'aménaïjement d'un van Ducato. N'en s'é minz en tête de partaïjer ene pièce ao Léghé ». Qheuru su le dessin en 3D, Morgan met su bout pour son van eune banqhiète convertibl' su mesure, qui ne manqe point d'étirer l'avizerie. « Tout l'monde nous disaet « c'ée dégourdi, c'te chòze-là ! Alours n'en sé dit que n'en pourraet le fère pour d'aotes et l'idée à print racine comme élà »

## SITÔT LE SUCCÈS

Porté par l'atinerie de tertout, Raphaël échète un nouviao van, un T5. « Elà a été notr' essayâ déqhute-ti. N'en a posté deûe ou tréfotos su les résaos sociaôs et hop, étaet parti ! Un aménageou a erpéré notr' travâ et nous a pâssé 10 commandes d'un coup. Le bouche à orailles a faet le ress ». Comme élà, Exokit é lancé pour de bon en novembre 2020. Son espécialité ? La sonjerrie et la fezerie de meubl' su mesure pour aménaïjer vans et fourgon.

Raphaël Guigo et Morgan Barroux dans un Transporter T6 récemment aménagé par Exokit.

**« A MAINTIÉ DE CH'MIN ENTER L'ARTISANAT ET LE SEMI-INDUSTRIË »**

O eune drôlerie et pas eune faillie : ses meubl' sont envoyés en kit, le montaije et la minze en pllance d'meurent à la charge de l'achetou. L'idée en runje à emenuzer le coutaïje de l'aménaïjement, pllait mondiment et vitement ; deûe anées pu tard, Exokit perpôze pu



Retrouvez cet article en breton et en gallo sur [cotesdarmor.fr](http://cotesdarmor.fr)

## PLUS D'INFOS

Exokit / Homad - 10 quai Armez  
22 000 Saint-Brieuc  
[www.exokit-van.com](http://www.exokit-van.com)  
[www.homad-van.com](http://www.homad-van.com)

de 45 emmancherries su mesure pour p'tits et grands vans.

Banqhiètes clic-clac, en L ou en U, meubl' de côté ou de traverse, colonnes éranjabl' par le monde. La totalité des pièces, passé la cllincâillerie, est fabriquée su pllance, ao Léghé, den un atelier qui emplaye asteur 10 comiz et qui peut fère à peu préee 450 aménaïjements par an. « N'en ée à mi-ch' min enter l'artisanat et le semi-industrië », vae de caï Morgan qui voye grand pour l'enterprinze. Pasqe Exokit a deméze faet de p'tits. Souvent de fae demandé par des pratiqes qhi souètent un amanaïjement entier de lou véhicule, Raphaël et Morgan ont lancé Homad en mai 2022. C'te nouvelle enterprinze perpoze le re-neuvri ou l'éqhiment en partie ou entier de vans neus ou de racheterries ; Comme terjou céz Exokit, l'èfère ée su mesure et peut comprendre', s'lon les bezoins, l'ouvraïjerie d'ouvertures, l'isolation, l'électricité, la minze en pllance d'un coin de qhièrie reqeneût... Et ben sûr l'amaenaijement en meubl' Exokit. « j'imaïjinons de mettr' su bout un résao de franchisé Homad en france, pour en-bonni les rapport o nos pratiqes et éblucer nos idées », précese Morgan.

Den l'étente, l'éqhipe d'Exokit vient d'éblucer ene nouvelle éfère, pour les ceusses qui rêvent de laizis nomades, sans pour aotant avoer un van « j'avons imaïjiné eune malle qui mélaye un couchaïje, eune glacière, eune batterie, un réchaod et un point d'iao, perzente Raphaël. Pllacée den le coffr', o permet d'amorphoser n'importe qhièul break, ludospace ou utilitaire en mini-van, et qui peut êtr' ramassée ao garaïje cant o n'sert pu ». De caï rendr' la van-life cor pu accessible. ●

Virginie Le Pape

\* Art de vivr' den un véhicule aménaïjé, perchain de la nature et den ene pleine liberté de mouvement.